

## EUR BROMEZE FERVANT HAC EUR SEPARASION

### ETRE DAOU DEN YAOUANK

Var ton ar *Fauz Promese*

Prosternet e ma c'halon  
N'ho presans, Bretonnet,  
Vit goulen o c'hattantion  
Eur momet en sekret !  
Me disclerio en guirion  
Eur promiseze fervant  
Hac eur separasion,  
Entre daou den iaouank,

Na fell quiet din er poent-man,  
Dont d'abusin paper ;  
Sujet avoalc'h a gavan  
Hep asten ar matier  
Eur re-bennag marteze  
A gemero an er  
Da meprisan ma bue  
Dre ma c'hespilki skler.

N'ont quiet dign a drouk-zello  
Pa n'am anaveet ket,  
Rac zavantoc'h evidon  
A zo bet n'em leuyet  
Ebars en lazo Venus  
Hac e mab Cupidon  
Pere a rent maleureuz,  
Sivoaz ! meur a galon.

Me a zo eun den iaouank  
Hac a meus consantet  
Karout eur plac'h iaouank  
Dign da vean karet :  
Vit dirag ma daoulagad  
Na meus remerquet hini  
Da gad eun er ken agreabl  
Herve ma fantasi

Vei gant Done inspiret,  
Da ouel an Assomplion,  
Me a zo bet azet  
N'he c'hichen 'n eur pardon,  
En parous Pleudaniel,  
Kichen eur goz illis  
Eur plas devot a zantel  
Goude fin an ofiz.

Eno var douar ar Verc'hez,  
Me meus bet remerquet  
He skiant hac e furnez  
Ha memez e genet.  
Me meus gret reflexion  
A n'em sonjet erfat  
Na momp biken separasion  
Vit mar be ze d'he grat,

Abofter ma iaouankis  
A neus ma arretet.  
Bet a voan vit n'en diviz  
Ha pa m'eus ket kredet  
Parlanti dei enep fesson  
Demeus ar garante  
A zanten bars em c'halon  
N'he c'hever en deze

Nao mis em bet en guirion  
Hep en em rancontri  
Delc'het ho c'hatansion  
Iaouankis me o suppli  
Aman e teu Cupidon  
Gant eun ardeur nevez  
Da allumi n'em c'halon  
Elemancho a garante.

Annons a riz d'ar plac'h-se,  
O vont d'eun assemble  
Penos am boa bolante,  
Da gat e c'hamitie :  
Hac evit n'em assuri  
Deus e fidelité  
A mens goulet diganti  
Ober din promesse.

#### AR PLAC'H

« Ma mignon nimp so iaouank  
D'ober promesseou ;  
Gant an disteran tourmant  
A chanc'h hom ideou :  
Ma torfemp hon promesse  
Hac obor eur parjur  
Me fell din en em bue  
Kavet eur guir assur.

#### AR POTR

« Birviken an amzer fall  
Na allo distrujan  
Ar garante leal  
Pehini a doogan ;  
Mes me zo en disfians  
Demeus ho garante :  
Roet din un assurans  
Vit a rest hon bue. »

#### AR PLAC'H

« Arsa eta, ma mignon,  
Pa omp en plas hirie  
Na vo quiet dre draison  
A rin dec'h promesse

Kemer a refomp vit test  
Eun avocat a Dreguer,  
Rac, on c'halon so c'hoas fresk  
Da chom hep culateur.

He dorn en hem hini,  
Prosternet d'an daoulin  
Dirag Sant Ervoan Elouri,  
Mab hegan Kervarzin,  
En iliz ar Minihi.  
An naoutek a vis mae  
A prometjomp dimezi  
Hon daou ann eil d'eguile.

Secret ve ar promesse  
Dirag eur pobl a leiz :  
Pere dired an de ze  
A bep coste a Vreiz  
Da velet penn hom avocat  
Dre guir devotion  
A douger var eur brancar  
Bars er procession.

O solennite joaüs  
Evit eur pobl a fe ;  
Biskoas de quen evuruz  
N'em boa cat em bue.  
Zantout a ran ma c'halon  
Vel beuet mesk ar joa :  
Mes ret e cat separasion  
Rac an noz a dosta.

#### AR POTR

« Arsa plac'h iaouank fidel,  
Poent eo dispartian.  
An heol zo arri izel :  
Leket din breman  
Eun termen d'a n'em gavet  
Herve ho polante,  
Rac pel a omp separet  
An eil deuz eguile. »

#### AR PLAC'H,

« De oisvet ar Zacramant  
Bars en kar Landreguer,  
Zo eun assemble charmant  
Gant ar bobl ar c'hartier  
Mar be ze d'ho polante,  
Pon daou n'imp ario  
En Landreguer, en de se  
Goude ar gouspero. »

000

**AR POTR**

« Var kement-se merc'h iaouank  
 Me souet dec'h bonsoar,  
 Gant kals a agreamant  
 Me a dalc'ho memoar.  
 D'an termen a eus ficset,  
 kredet m'e en em gavo ;  
 Na vefomp biken separet,  
 Vit ar rest on deyo. »

Pa aris bars er guer,  
 A meus bet ispliket  
 Deun tad a deur vamm tener  
 Ar promesse moa gret.  
 O daou a skuljont daero  
 O c'haneveout ma chanç,  
 Mes n'os eo pel a zo  
 Reposomp en silanç.

Kerkent e vanez kousket  
 Vel 'n eur ravissamant,  
 Hac e meus bet remerket  
 Eur groas ker a arc'hant  
 Ha varni eur gurunen  
 Ornet gant greun perles,  
 Poset en creis eur bleuen  
 En kichen ma mestres.

Dre spont on bet difunet  
 Mes goelet meus bet erfat  
 Ma mestres bars 'n eur archet  
 Dirag ma daoulagad ;  
 Bet on pel e vemorin  
 Var sujet kement-se ;  
 Mes rabet eo 'n droublin  
 Vit actou eun unvre.

Tostad a ra d'an termen  
 Pini m'am assinet ;  
 Mes goelet a ran eun den  
 O tonet d'am c'havet ;  
 Roet neus din eul liser  
 A zo bordet en du  
 Petra zo var ar paper  
 Ret eo goelet dustu.

*Al liser*

- Salut deoc'h ma guir vignon
- C'hoas eur vech dre speret ;
- N'in quet d'an assinasion
- A moa dec'h prometet.
- Skoet on gant eur c'hlevet,
- Me gret vit ar maro,
- N'omp ket gan Doue choaset
- Vit bean priejo.

« Ma be a deni da gleuzan  
 « Var ben neubeut amzer.  
 « Vit ar vech divezan  
 « Adieu ma servijer.  
 « Gras dimp da gaout chans,  
 « D'an n'em velet er gloar  
 « Evit hon recompans. »

*AR POTR out-lan he unan*

« O bleuen ken florissant  
 Ma kouees d'an douar,  
 Tout ma oll agreamant  
 A chanchon en glac'har ;  
 Oll esperans ma deio  
 Plijadur ma bue,  
 Assambles guenit a goueo  
 Da repos bars da ve

Rabet eo disconsoli  
 Vit guellet al lizer,  
 An termen a so arri ;  
 Varc hoas en Landreguer,  
 Me a glevo a beurs mad  
 Ha guir eo kement man ;  
 Ar paper a lest lakat  
 Sort a guerer varan. »

Arri bars en Landreguer,  
 D'an termen assinet  
 Vel ma sonnias peder heur,  
 Me meus bet intantet  
 Eur plac hik iaouank tremen,  
 Laret d'he camaradez :  
 « Sell aze emezi eun den  
 Zo maro he vestrez. »

Poignardet eo ma c'halon  
 Ken a frim ma goad  
 Vit klevet e declarasion  
 En em c'hanavis d'he c'had ;  
 « Respont din merc'h iaouank,  
 Mar be ho madelez,  
 Me a c'houl humblamant  
 Pénos a ra ma mestres. »

**AR PLAC'H IAOUANK**

« Na servij ket den iaouank,  
 Rei dec'h anondegues :  
 C'houl a zo bet eun tirant  
 En andret ho mestres :  
 Hi divoar goele ar maro  
 A lekas he foan  
 Da scrivan dec'h ar c'helo  
 Mes c'heus ket groet a van.

Me a moa e c'hasistet  
 Da skrivan al lizer  
 Goude ma franchisset  
 Ha roet d'ar facteur,  
 Hi finissas he bue  
 D'ar goener d'abarde  
 Ha herie deus ar beure  
 E diskennet 'n he be »

**AR POTR.**

« Ma moa kals a esperans  
 A voa lauz al lizer,  
 Pe groet gant tud ar mezans  
 Vit tremen ho amzer.  
 Mes ho comzo ken pikant  
 A boes var ma speret  
 Me a lar dec'h merc'h yaouanq  
 Kenavo 'r c'henta goelet. »

Kouitat a riz an assamble,  
 Occupet ma speret ;  
 Rac me en em vel hirie  
 Maleureus var ar bed,  
 Ma mestres a zo maro  
 Ha me a chom breman  
 Da dipitan ma deio  
 Var he ler'ch er bed-man.

N'avean ket ar matier  
 A galmfe ma glac'har ;  
 Me na mo ken mes malheur  
 Biken var an douar  
 Pa velan peguen iaouank  
 A c'he deut ar maro  
 D'am plomji bars en tonrmant  
 Deus a greis ma joaio.

Servij ket din chom aman  
 Da isplikan kanvo  
 Rac na allan ket kanan  
 Ha goelan var eun dro :  
 Supplian a ran Doue  
 Maro var ar C'halvar  
 Ma recevo he c'hine  
 Ha nimp holl en he gloar.

Groet gant Pierre RAISON.  
 Goude bean recevet an deklarasion  
 Digant eun den iaouank desolet  
 Gant glac'har de vuan karet.

(Propriété de l'éditeur.)

